


EN 3.2 - 042

Passion. Ile de Sein



8N3-2-042



Passion du Bon Adrou  
Jesus CHRIST  
de ENEZ-SUN

## PASSION HON AUTOU JESU

Ebars er jardin Olivet  
Antreomp varlec'h Jesus  
Contemplomb Redemptor ar b  
En e agoni poanius  
E galon beuzet er glac'har  
E zaoulagad en daelou  
Eo pleguet betec an douar  
Dindan poez or pec'hejou

Pebeuz burzud a garantez!  
Cetu Mestr bras an envou  
En em samet dre drugarez  
A lousdoni or c'himou  
Pebeuz sam a boez varnezan!  
Ar pec'hejou tremenet  
Ar re a goumetter brema  
Ac ar re vo commettet!

Adalec ar pac'het quenta  
Eus hon tad Adam guechall  
Betec ar pec'het diveza  
Eusan diveza den fall  
Var e guein ho guelan berniet  
Pebeus sam a bec'hejou!  
Goudeze bezit estonet  
Ma scuill quement a zaelou/

Pec'her te ac'h eus er guisquet  
Eus a lornez da grimou  
En dro dasan ec'h eus scoulmet  
Eur c'houris a bec'hejou  
Penaus ec'h eus dishenvelet  
Un Doue santel ha pur?  
Cetu ar froues milliguet  
Eus da galon dinatur.

En eur stad quer vil, quen euzus  
E dad en deus heug outhan  
E zaoukagad carantezus  
A zistro divarnezan  
Diaguent e vuya karet  
A complezanç e galon  
Jesus brema so an objet  
Eus e valediction

Evit ma vije assuret  
Eus an arret solanel  
En deus douguet en e enep  
E tigaç dezan un ael  
En e zorn eur c'halir c'hoero  
Leun eus a ly or c'himou  
Ac en e voelet ar maro  
Froues trist or pec'hejou

O velet ne voa mui moyen  
Da douch e dad coleret  
E teu da gaout e zisquibien  
Allas! ac ho c'haf cousquet.  
Dilezel eo an abandon  
Gant an dud a gant e dad,  
A nep-tu consolation:  
Doue pebeus calonad!

Souden dioutho e pella  
Ac e commanç a nevez  
Da hirvoudi ha da voela,  
Gant ar spont ac an encres.  
Arauc an tourmanchou garo  
So evithan preparet  
Circonstanç ebet anezo  
Ne all echap d'he spered.

En amzer eus e bassion  
E souffro, a dra certen,  
Poaniou bras, cals confusion,  
Maes an eil goude e ben.  
Ama ho sant oll assambles  
Evel bleizi arrajet;  
En eur mor a dristidiguez  
E galon a so beuzet.

Enem velet ara guerzet  
Gant Judas, an treitour fall;  
Gant Per mameus e zeo nac'het,  
Dilezet gant ar re all  
Deja e sant ar scourjezou  
O tispenn e gorf santel  
Ac ous ar groas he vemprou  
Staguet gant tachou cruel.

Er guel a guer bras tourmanchou  
Ec'h antren en agoni;  
Maes ar pez a gresq e boaniou  
E zeo hon ingrateri:  
Pa vel quement a souffrançou  
Collet evit ar pec'her,  
Ar goad eus e oll vemprou  
Var an douar a ziver.

Deut da zestum ar beradou  
Eus ar goad precius  
A ziret, evl pizennou  
Eus a gorf divin Jésus. O consideri  
O consideri e anquen  
Ac e c'hlac'har diremet  
Dre zaelou eür guir binijen  
Desquit goalc'hi ho pec'het.

Saludi a ran Jesus  
Ac he basion truesus.  
Ra vezo scrivet em c'halon  
Jesus ac he Holl bassion.

Tad 'eternel deohoch'h ec'h ofran  
Dre zourn Mari ar zalud-man  
Evit ma vezin pardonnet  
Dre verit ho Mab benniguet

Speret Santel me ho supli  
Grit d'in ar c'has da saludi  
Gant eur guir regret em ene  
Passion Jesus, va Doue

D'he ziskibien e lavare  
Jesus ken Pasc var dro daou ze  
Map an den a vezo livret  
Evit beza crucifiet

Neuze prinset ar veleien  
Ac eus ar bobl re ancien  
Da gonferi en em gavas  
E ti ar pontif Caiphas.

Cuzul a rejont entre-zo  
Da lakat Jesus d'ar maro  
Non pas eme-z-ho, deiz ar gouel  
Na zeue eur revolt da sevel.

Jesus o veza en eun ti  
Da Simon lovr e Bethani  
E tostaas out-han eur vaoues  
Ac a voa gui benitantes.

Hon-nes var he ben a scuillas  
Pa edo o tibri he repas  
Eun ongant ar preciuissa  
Gant eur c'houez an excellanta.

He ziskibien a vurmuras  
Dre ar goal exempl a Judas:  
Perac, em-z-ho, e coller  
Eun dra zo ken ker?

Ma vije guerzet an ongant  
E vije savet fors arc'hant  
Evit soulagi ar beorien  
Eme Judas, oc'h he repren.

N'oa ket ar beorien a glaske  
Laer oa, ac eur ialc'h a zougue  
Da receo an aluzennou  
Avèze offret d'hon Autrou.

Pemac, eme Jesus neuse  
E reprenit-hu evel-se  
Ar vaoues-ma, pa e deveus gret  
Un oeuvr-mad brema em andret.

Rac o teurel var-n-on he ongant  
E tiscleri va enterramant;  
Dre holl e vezo dre ar bed  
Ar pez e deus gret, publiet.

Judas a ieas neuze-soudent  
Da gaout princet ar veleien:  
Petra reot-hu d'in-me, eme-z-han  
Ha me livro d'eoc'h anezhan?

Prometi a reont en instant  
Rei d'ezhan tregont pez arc'hant  
Ha nemet ar gommodite  
D'he livra d'ezho, ne glaske.

Diskibien Jesus goude-ze  
A c'houlennas out-han ive:  
Peleac'h ez aimp da brepari  
Ar Pasc d'e-oc'h evit he zibri?

It e kear da gaout eur certen  
Ha livirit d'ezhan evelle:  
Tost, eme ar mestr, e va amzer,  
D'ho ti ar Pasc ez an da ober.

He ziskibien a brepargas  
Ar Pasc el èeac'h ma lavaras,  
Ha gant-ho var an abardaes  
Ez eas ous tacl var he c'hourves

P'edont o tibri ho repas,  
Evellen-out-ho e comsas:  
Unan a dle eus ho toues  
Va zrahissa e guiriones.

Peb hini trist oc'h he glevet  
A gommansas da lavaret  
Autrou ha ma, eo, ha me eo,  
Jesus a respontas d'ezho:

Er plac gan-en nep a laca  
He zor n à dle ma zrahissa;  
Map an den a ia en effet  
Dious ma'z eo anezan scrivet.

Hoguen maleur a c'hoarvezo  
Gant an den-ze am zrahissos;  
Guel vije d'ezhan hep mar ebet  
Na vije bet biscoas ganet.

Judas pini en trahissas,  
Out-han ive a c'houlennas:  
Ha me 'ta, mestr, e ve hennez?  
Lavaret, emean, e gan-ez.

D'he ziskibien neuze e voalc'has  
H zreid, hep excepti Judas,  
Ho zec'has gant eul lianen  
Var he zaoulin, en noas he ben.

Gant eur garantez ar vrassa  
Pa oant gant-han da goania  
Ec'h instituas hor Salver  
Ar sacramant eus an auter.

D'ezho er goan-ze diveza  
E roas da zibri ha da eva  
Ar bara chenchet ac ar guin  
En he gorf ac en he c'hoad divin

Ne evin mui diver brema,  
Eme Jesus, esu ar guin-mà,  
Ken a zo em rouanteles,  
Eleac(h ma evin guin nevez.

Goude ma ho devoa coaniet;  
Judas digant-o sortiet,  
Ac a veza canet an hymn,  
Ez ejont varzu ar jardin.

Antreet er jardon Olives,  
Kemeret Per, Ian ha Jackes,  
E lavaras Jesus d'ezho:  
Trist e va ene bete'r maro.

Pelleet diout-ho gant glac'har,  
En em brosternas d'an douar,  
An ec'h adressas he beden  
D'e Dad eternel evellen:

Mar d'e possUBL, va Zad divin  
Pellait ar c'halir-ze diouz-in:  
Maes bezt great ho polonte,  
Non pas va hini me ive.

A ben teir gueach he oraeson,  
A eure er memes faeson:  
Ac e teu c'hoas d'he redoublie,  
O veza couezet en agonie.

Dreizan eur c'houezen vrás divad  
A zeuas e guis baradou goad,  
O coueza eno diout-an,  
Ken a boullade dindan-han.

Chetu diskennet eus an Ee  
Eun Ael d'hè gonforti neuze;  
Hac o veza great he beden  
E teuas da gaout he ziskibien.

Maes allas!cousket ho c'havas,  
Rac-se d'hezho e lavaras:  
Dihunit ha grit oraeson,  
Na gouessac'h en tantation.

Livret vezin brema souden  
Etre daouarn ar bec'herien:  
Savit ha deomp:tostaat a ra  
Nep zo erru d'am zrahissa.

N'en devoa ket c'hoas echuet  
E gomsou, ne doa erruet  
Judas er Jardin d'anternos  
Gant eur vanden tud armet-clos.

An treitour a dostaas out-han  
Evit ober eur poc d'ezhan:  
O lavaret, Ave, Rabbi  
Dont a ran, mestr, d'ho saludi.

P'evit tra, eme hor Salver,  
Ez oc'h-hu deut, ma mignon ker,  
Penaus, Judas, ac er guis-se  
Gant eur poc em zrahissit-me?

Ouz ar vanden-se pa gomsas,  
Piou a glaskit, a c'houennas;  
Chetu hi neuze o lamaret:  
An den Jesus a Nazaret?

Me eo, a respontas Jesus:  
Ous ar goms-ma ker graciis  
Var ho c'his en em retirjont  
Ac a stoc ho c'horf e couejont.

Mar d-e me, emeza, a glaskit,  
Lesit ar re-ma da vont kuit;  
Eus e ziskibien e comze  
D'ho lezel en ho liberté.

Per oc'h guelet o tostaat  
Evit cregui en e vestr mad,  
He gleze a zic'houinas,  
Ha scouarn Malcus a drouc'has.

Jesus a respontas neuze:  
List brema, Per, var guement-se;  
P'en deuz va zad presantet d'in  
Ar c'halir-ma, sur hen evin.

Scouarn an den-ze a lac'has  
Ha d'ar vanden-ze a lavaras:  
Gant elezeier ha gant bizier  
Em c'hemerit evel eul laer.

Bemdes gan-e-hoc'h en em gaven  
En templ o presec va lezen,  
Hep e c'hallac'h cregui en-on;  
Brema hoc'h eus permission.

Evel bleizi 'ta var un oan,  
E lampjont neuze var-n-ez-han,  
Ac e voe gant-o goall dretet  
Ha start gant kerden amarret.

He ziskibien gant eur spont bras  
O tec'het hen abandonas,  
Ac hen o veza garrotet,  
Da di ar Pontif e oe caset,

Var he zoctrin gant Caiphas  
Interrojet, e respontas:  
Publicamant em eus comset  
D'an oll en templ en em gavet.

Peadra 'ta em interrojit  
Var va doctrin pa 'z e public?  
Ar re zo bet oc'h va c'hleevet  
A oar petra m'eus prezeguet.

Responentet gant-han evellen,  
Unan eus an offiserien  
A roas eur javedad d'ezhan:  
Evelse e comsez,emezan?

Mar emeus,eme Vap Doue  
Drouc lavaret, discouezit-e;  
Maes mar em eus lavaret mad,  
Perac rei d'in eur javedad.

Clasc a reont eur fals testeni  
Evit d'ar maro he gondaouni;  
Ha ne doa nicun suffisant  
A guement test a voa present.

Daou fals test a zeuas a la fin,  
Ac a zepose traou malin;  
Hoguen Jesus ne rea seblant  
Evit ho c'hlevet o parlant.

Ar pontif neuze a savas,  
Ha d'hor Salver e lavaras:  
Penaus ne respontes netra  
Ous an holl desteniou-ma

A-bers Doue me da gonjur  
Da lavaret ha te eo sur  
Ar Messias Mab da Zoue?  
Ia,me en deun,emezan,e

Hoguen me lavar d'e-hoc'h ouspen  
E velot eun deiz Mab an den  
Azezet en tu diou d'he Dad  
O tont d'ho parn var ar c'houabr

Neuze ar Pontif a freuzas  
He viscamant ac a grias:  
Chetu e o tont da vlasfemi;  
Pebes izom a desteni?

Clevet hoc'h eus holl breman  
Petra sonjit-hu anezan?  
Oll e crijont,o lavaret:  
Ar maro en deus meritet.

Neuze o commans d'he c'hoapaat  
Ac en he visach da granchat,  
E roent d'ezhan javedadou,  
Taolou dorn ha crabananadou.

Var he zaoulagad eur vanden  
E lekejont en dro d'he ben,  
O lavaret pa scoent ganta  
Divin piou a tarho brema?

Cant cals ouspen a injuriou  
A vlasfémou ac a gestou  
En outrajent oc'h inventi  
Peb seurt faeson d'he tourmant.

Sant Per evit guelet ar fin  
A ieas varlec'h he vestr divin  
Ac antreet e court Caïphas,  
E-hars an tan ec'h azezas.

Eur servicheres o veza  
Consideret piz aneza:  
C'houi,emezi,a voa ive  
Oc'h heul Jesus a C'halilee.

Dirac an holl Per en nac'has,  
Ac evellen e respontas:  
Penaus,maoues,me ne oun ket  
Petra fell d'e-hoc'h da lavaret?

Da benn eun nebeut goude-ze  
Eun all d'ar poent ma sortie,  
A lavaras:hema zo bet  
Oc'h heul Jesus a Nazareth.

Per en disavouas adarre,  
Oc'h assuri memes dre he le  
Penaus n'anaie ket an den  
Ma comzent aneza zoken.

Re-all en eur dostaat out-han,  
A lavaras ive d'ezhan:  
Eus he dud oud certenamant,  
Rac anat oud dre da barlant.

Chetu en ous en em detesti  
Hag o touet c'hoas mî-oc'h-vui  
Ne anaie ket en den-ze;  
Ac e canas ar c'hog neuze.

Ous Per pa sellas hor Zalver,  
Sonch a zeuas d'ezhan eus he c'hér,  
Kent ma cano divouech ar c'hoc,  
A ben teir guech,Pér,em nac'hoc.

E-meas o veza sortiet  
E vouelas drus Per d'he bec'het,  
Ha Jesus a oue mintin mat  
Livre etre daouarn Pilat.

Judas o velet condaonet  
Hor Zalver hep achap ebet,  
A regretas he drahison  
Gant eur c'heus a voa diraezon.

Renta a reas d'ar re ancien  
Ha da brinset ar veleien  
Ar som en devoa recevet  
Digant-ho d'he veza livret.

Pec'hi am eus gret emeza,  
Enep Jesus oc'h he verza:  
Goad eun den just am eus livret  
Hep en devoa gret drouc ebet.

Pe sourci d'eomp-ni,emezo?  
Ni ne reomp forz; evid-hoc'h eo;  
Chetu en o vont en he valer,  
D'en em grouga dre zizespzs.

Piou na scrije,o va Jesus,  
O velet peguen dangerus  
Eo dre eur goall gommunion  
Ho trahissa en hor c'halon?

En zo pernisius iva  
An avaristed d'hon ene:  
Pa denn d'eomp,evel da Judas,  
Abars ar fin eur maler bras!

Jesus dirac ar presidant  
A voe accuset faussamant;  
Hoguen ne respontas netra  
Evit en em justifia.

Pilat ous Jesus a c'houlen  
Ha c'houle e roue ar Judevien?  
Va rouanteles,emeza,  
Ned-e ket,eveus ar bed-ma.

Roue oc'h eta,eme Pilat?  
Il,c'houi en lavar erfat:  
Evit souten ar virione,  
Eme,Jesus,ount deut ive.

Pilat,goude,d'ar Judevien  
Ha da brihset ar veleien  
Alavaras:ne gavan ket  
Coupabl an den-ma a gril ebet.

Hi mui-oc'h-vui a boursue,  
Ar bobl,emezo,a drouble,  
Oc'h ho dispos gant he zoctrin  
D'en em revolti alafin.

Pilat o classe en em viret  
Ous peb seurt blam en he andret  
En renvoyas da Herodes  
A voä e kear neuze memes.

Hema en devoe eur joa vrás  
Jesus dira-z-han pa velas,  
Dre an esperans d'he lacat  
Da ober eur märacl bennac.

Ac o sonjal e contantche  
Jesus he guriosité,  
Uont-han forz traou a c'houlenna  
Maes hen biscoas n'en respontas.

Chetu neuze 'ta Herodes  
Assambles gant tud he bales  
Oc'h he dreti gant goaperes  
Ha gant cals a voufoneres.

Oc'he he veza guisket ousspen  
Evel eur foll gant eur sae venn,  
Ec'h eure he gass var ke guis,  
Da Bilat en eun dall iskis.

Neuze Pilat a lavaras  
D'ar Judevien pa ho assamblas:  
An den-ma n'en deus gret netra  
Eus ar pez a vlammit en-ha.

Herodes n'her c'haf ket ive  
Din d'ar maro mu guet don-me;  
Rac se 'ta m'en laosko brema  
Goude lacat he gastiza.

Chetu Pilat o tilezel  
Jesus gant soudardet cruel,  
Pere a zeuas d'he zivisca  
Ac ous ar pilier d'he staga.

Ar re ma eguis diaoulou  
Gant guial, kerdin, chadennou,  
A scoe var ar c'horf dilicat  
Eus an oan dous ac egarat.

Kement her foetchont tro var dro  
Ma velent he eskern dijolo;  
Adal ar pen betec an troad  
Ne voa nemet gouli ha goad.

C'hoas ho devoe ar grisderi  
Evit roue ar fars d'he dreti,  
Ha da lacaat eur gurunen  
Gret a spern calet var e ben.

Goude o teurel var he gorf noas  
Eur vantel bourpr dreist he zioscoa  
E lekejont eur benduen  
En he zorn deou, pe eur ganen.

Ac oc'h ober goap anezhan,  
Ez eont d'an daoulin diraz-han,  
En eur lavaret evellen:  
M'ho salud, roue ar Judevien.

En he visaj, sacr e cranchent,  
Ac hep trues e kemerent  
Eus he zorn santel ar ganen,  
Evit skei gant-ha var ar pen.

Pilat évit touch calonou  
Ar Judevien ous hon Actrou  
Er stad'se en discuezas d'ezho,  
Olavaret "Ecce Homo"

Sellit, chetu an den- ama  
Trues a dleit da gacout out-ha;  
Evid-on-me ne gavan ket  
E ve coupabl a grim ebet.

Rac-se pa'z eo daut an amzer  
Da ziliwra eur prisonnier,  
Daoust d'he-hoc'h pe Jesus ho prez  
Pe'r muntrer Barrabas vez.

An dud fall-ze a gommansas  
Da grial:roit d'eomp Barrabas,  
Ha casit hennés a-lesse;  
Crucifiit-e, crucifiit-e.

Mes Pilat a glaske ato  
He zilivra dious ar maro:  
Hi arrajetoc'h a grie:  
Crusifiit-e, crusifiit-e.

Pilat o velet mui-ous-vui  
Ho revoltamant o creski  
A voalc'has neuze dira-z-ho  
He zaouarn,o respont d'ezho:

Divlam oun dious goad ar just-ma  
C'houi a resproto aneza;  
He c'hood var-n-omp-ni ha gouezo  
Ha var hor bugale,eme-z-ho.

Pilat d'ez'ho a ziliyras  
Dre eur respet humen Barrabas  
Ac a gounaonas hor Salver  
D'ar maro et memes amzer.

Neuze 'ta e croohont enhan  
O rei eur groas pouner d'ezhan  
Gant eun hu ac eur joa barbar  
Evit he douguen d'ar C'halvar.

Eun den e biou a dremene  
A c'halvet Simon Cirenee  
Ac a gontrainjont d'he souten;  
Evit he sicour d'he douguen.

Gant cals a bobl ac a verc(het),  
Pere a vouele, oa heuliet:  
Maes Jesus o tistrei endro  
A gomsas evellen ou<sup>h</sup>o:

Var-n-hoc'h ha var ho pugale  
Gouelit,ha non pas var-n-on-me,  
Rac chetu erru eun amzer,  
A nec'hamant ac a valer.

Neuze gant eur c'haoun diremet,  
E commansint da lavaret:  
Meneziou, var-n-omp-ni couezit,  
Ha c'houi, torguennou, hor c'huzit.

Rac mar d-eo evellen tretet  
Ar c'hoad glas pe an den parfet,  
Petric vezan dretamant,  
D'ar c'hoad seac'h pe d'an den me

Eun druez oa he velet  
Gant ar groas pouner-ze grevet;  
Allas! en he guein dindan-hi  
Ez oa treus tri bis eur gouli.

Var ar memes pa erruas,  
Ar vourrevien hen diviscas  
Eus e sae a ioa gret ep gri  
Gant e bam ar Verc'hez Vari.

Jesus var ar groas astennet  
A oe neuze out-hi staguet  
En he dreid ac en e zaouarn  
E oe plantet tachou ouarn.

Piou a ouffe, o va Jesus,  
Compren an tourman ker grevus  
A santchoc'h pa laoschchont ho cro  
En toull da gouveza gant strons br

Goude ma'z oa 'ta hor Salver  
Crucifiet etre daou lass  
Var he zillat e oe tollet  
An sort ma vijent ingalet.

Neuze oc'h hija ho fennou  
Ac o lavaret blasphemou,  
Evit galloud he zipitan  
E consent evellen out-han.

Souez, mar d-oud Map da Zoue  
Na ziskennes eus ar groas-se?  
A re all en deus sauveete,  
Maes en em savetei n'ell ket.

Jesus elec'h goulen venjans  
Eus an hevelep disprijans  
Pardon d'ez'ho a c'houenne,  
Ac ous he Dad ho excuse.

He oll c'hoad o veza scuillet,  
Ne alle mui gant ar sec'het,  
Ac e roas an dud cris d'ezha  
Guin aegr gant vestl evit eva.

Guelet e vamm e-hars ar groas  
A greske cals e boaniou bras;  
Rac he c'halon a voa mantret  
Gant eur glaçhar estranch meurbet.

Teir heur en bues ous ar groas  
Var boues an tachou e choumas;  
He dourmant o voa ken horribl  
Ma crene an troou insansbl.

Rac-se an eol a denvalaas  
Ar gouel en templ en em rannas,  
An douar ferm a horjelle  
Ac ar mein eris en em fraille.

D'ar fin oc'h ober eur c'hri bras  
Jesus er groas a dremenas  
En he dourmanchou o vèrvel  
Da rei d'eomp ar vuhez eternel.

Goude he varo e oe ive  
Plantet eul lans en he goste  
Ac e sortias dour ha goad  
Anezhan, evit hon netaat.

Gant Joseph ha Nicodemus  
E oe goudeze korf Jesus  
Eus ar groas santel diskennet  
Var barlen e vam benniguet.

Piou a uffe consideri  
An anken e devoe Mari  
Hep e ve touchet e galon  
Gant regret ha compassion?

Allaz emezi, va Map ker  
Allas, va Doue, va Salver  
Houma eo an ingrateri  
Hoc'h eus-hu ranket d'anduri!

O caera den a oe biscoas!  
Pe'stad oc'h-hu leket siouas!  
Ne allan mui oc'h ho cuelet  
Kement, oc'h dishenvelebet.

Perac, va Jesus, va Doue  
Oc'h-hu marzeriet evel-se?  
Piou en deus gret d'eoc'h-hu mervel  
Ha souffr pourmanchou ker cruel?

Allas, pec'herien obstinet  
C'houi hoc'h eus en evellen tretet  
C'houi hoc'h eus muntr et evellen  
Ma Map divin; grit pinijen.

Ia guerc'hes, m'her goar erfat  
Eo me zo bæt an den ingrati  
Am eus er guis-se massacret  
Siouas! ho Map muia karet.

Rak-se pardon a c'houllennan  
Digan-e hoc'h ha digant-han  
Oc'h ho suplia da ober  
Va feoc'h out-han dre ho touster.

Perac, allas na d-e rannet  
Va c'halon gant eur guir regret  
Da veza bet dre va c'himou  
Roet ar maro d'am Aotrou?

Dessin am eus da veva guell,  
Ac e choassen mil gueach meravel  
Kent ma teuen dre nep seurt pec'hed  
D'he grucifia mui népret.

Pebes grasou a ouffen-me  
Da renta d'ec'h-hu va Doue  
O veza souffret evid-on  
Eur maro cris a vir galon?

Va Jesus, evit hoc'h enor,  
Grit ma vezo va holl densor  
Douguen gan-e-hoc'h ivé bemdes  
Ar groas bete fin va bues.

Me fell d'in chom hivisiken  
E hars ho croas gant Madalen,  
Evit gouela va fec'hejou  
A zo bet caus d'ho tourmanchou.

Va c'hampr a rin eus ho costes  
Da gontampli ar garantes  
H'oc'h eus siscueset em andret,  
Pa oc'h evid-on en em livret.

Evit bara ha souffransou  
A servijo d'in, va Autrou;  
Evit breuvach ma guemero  
Gant ho cuin-aegr ho vestl c'houero

Ho passion imprimet doun  
Gant ho pemp gouli em c'haloun,  
Scrivit en-hi ho scourjezou  
Ho croas, ho sperrn ac ho tachou.

En heur ar maro, va Doue  
Goalc'hit gant ho coad va ene  
Ha roit d'in dre ho passion  
Eus va fec'hed remission.

Corf Jesus a oe sebeliet  
Etoues eul lincer guenn meurbet  
He kekeet en eur bez neve  
Tailliet er roc'h eno ive.

Ous an antre eus ar bez-man  
Ez eo ruillet eur mean.  
Pini a voa bras ha punner  
Da serra var gorf hor Salver.

Eno erfin an teir Mari  
A choumas da gonsideri  
Pe faeson ha pa ha gostes  
Ez eo lakeet he gorf er bez.